


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 12 - Kerzu 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

Echu eo koumanant 1967.

Koumananterion 1968 hepken a zegemero niverenn Genver.

T a o l e n n

Stad al labour e diwezh 1967	p. 313
Evezhiadennoù war stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall	p. 319
<u>Kuzul ar Brezhoneg</u> hag an Emsav	p. 324
Roll ar pennadoù embannet gant <u>Emsav</u> e 1967	p. 334
Gerva 1967	p. 337

STAD AL LABOUR E DIWEZH 1967

Gant daouzekvet niverenn Emsav ez eo mat ober ur sell-tro war dachenn al labour.

E 1962 e stage ganti un dornadig tud. O lakadenn-loc'hañ oa n'eus ket a Emsav hep emsaverion, ha dre-se, mar soñjant evel an holl ez eo an emsaverion a ra an Emsav, e lakaent ouzhpenn en deus an Emsav da grouiñ an emsaverion. Alese ar benveg-stummañ a zeraoujont sevel, a zo hiziv en hor c'herz.

Treset ez eus un hentadur pazennaouet resis o kas eus an derez mann betek talbennoù an Emsav, - an derez mann o vezañ stad an dud e Breizh hep anaoudegezh eus ar yezh, hep an disterañ stummadur emsavel.

An hentadur-se zo dezhañ tri zennad, tri derez, a c'haller termenañ evel-henn : dont tre er bed brezhonek, piaouañ kevala istorek (1) an Emsav, kemer lec'h en Emsav.

Emañ an derez kentañ e kefridi Kelc'h Debauvais. Ar C'helc'h a aoz bruderezh er c'hêrioù ma emañ diazezet a-benn bodañ danvez skolidi. Dasparzhet e vez ar re-mañ etre ur c'horf a gelennerion urzhiet-strizh. Ken strizh-all e vez kenurzhiet al labour a-hed ar bloavezh-skol evit degas an disoc'hoù uhelañ dindan an amzer verrañ. Ne vez ket miret war ar roll ar skolidi na heuliont ket, dre forzh pe abeg e ve, raktres sizhuniek ar gelennadurezh. Houmañ a c'hoarvez a zeskiñ brezhoneg eeun skrivet ha komzet, diazezoù an Istor en ur c'hentañ bloavezh, elfennoù al lennegezh, ar yezh ouiziel ha kalvez-el en un eilvet bloavezh. O skoazell a c'houlenn ar C'helc'h digant aozadurioù dizalc'h evel Skol Ober evit reizhadur ar poelladennoù, K.E.A.V. evit gwelladur ar skolidi war ar yezh komzet. Adalek diwezh ar bloavezh kentañ e vez aotreet ar skolidi, diouzh ma'z int barrek, da dremen arnodenn an Trec'h Kentañ. Ouzhpenn-se, diwar fin ar bloav-

ezh kentañ bepred en o feder da gemer perzh e devezhioù studi ha stummañ, hage fizier enno kefridioù da seveniñ dindan renerezh kargidi eus ar C'helc'h pe eus an aozadurioù kevreet.

E-kichen Kelc'h Debauvais, emañ abaoe an hañv diwezhañ, un aozadur nevez o plediñ gant diorreadur ar grennarded, Framm Yaouank-iz Vreizh.

War an eil derez emañ S.A.D.E.D.. Adalek ar 6^t bloavezh-skol, an hini a zo o ren, ez eo skoueriekaet ar studioù eil derez, en un doare hebleg a-walc'h evit ma c'hallo pep hini dibab ar roll labour a zere ouzh e zonezonoù hag ouzh ar c'hefridioù goulennet digantañ, hogen evelkent oc'h enderc'hel un niver a zanvezioù ret (2), evel ma tiskouez ar Reizhennoù nevez embannet. Tra nevez ivez, adalek ar bloavezh-mañ e vo klozet pep rummad-studi gant un arnodenn, ar berzh en arnodenn-se o lakaat ar studier e piaou d'un testeni. Gant c'hwec'h testeni e tiraez ur c'hraz kentañ, anvet ar sebouriezh. Evit gounit an eil graz, anvet an drevouriezh, e rank sevel div oberenn dre skrid, pleustradennoù war daou zanvez disheñvel eus ar roll kelennadurezh. Ouzhpenn o labour-skol o deus skolidi S.A.D.E.D. da gemer perzh a) en dalc'hoù studi ha stummañ emsavel hollek, politikel, gwazadurel, lennegel, h.a., a vez aozet e ren ar bloaz gant ar strollad pe gant an aozadurioù kevreet, b) el labour gwazadurel pe arbennik (kelennerezh, reizherezh poelladennoù, skridaozerezh, bruderezh, standur ar gwazvaou, h.a.) a zegas anezho da gaout renk etre an emsaverion. Tri bloavezh e pad ar studioù reoliek e S.A.D.E.D., lakaomp pevar bloavezh evit ar studierion a ya betek an drevouriezh. A-raok diwezh an tri bloavezh-se avat e tremen ar studier war an trede derez, hini al labour war an dachenn.

Derez ar gefridiaded eo an trede derez, da lavarout eo ar par ma kemer an emsaver stummet e garg en Emsav. Liesdoare ha kemmus eo dre ret an derez-se. Derc'hel kont ez eus d'ober eus ezhommoù an ampoent, eus donezonoù, barregezhioù ha stummadur pep hini. An hent-

où a denn war un dro d'ar genurzh ha d'ar gengrad, muioc'h d'ar gengrad keit ha ma chome bihan niver ar gefridiaded, muioc'h d'ar genurzh bep ma kresk o niver. Daveet e c'hell bezañ an hevelep kefridiad pe d'ur skourr politikel, pe d'ur skourr kelennadurel, pe d'ur skourr meradurel kenkoulz-all. Dre dermenadur, e tle un emsaver stummet bezañ gouest da adsevel ar framm a-bezh, goude ma ne ve nemetañ o chom eus an holl gefridiaded a labourere ennañ.

Dindan dri bloaz enta ez eur evit tremen eus an derez mann da live ar gefridiaded ha kemer perzh oberiant en Emsav rakstadel. Dalc'het ez eus kont evel just eus an deskadur dastumet er skolioù estren a-hend-all.

E diwezh 1967, mar'd eus ul lakadenn diazez da zezrevell, ez eo : an emsaverion stummet a ra an Emsav frammet.

Bep ma kreske an Emsav war dachenn ar stummañ, ez ae war-raok a dizh bras en un domani all, hini an diorreadur politikel. Abaoe ugent vloaz edo un dornadig labourerion o pleustriñ dizehan war an danvez politikel. En An Avel, Avel an Trec'h (3) emañ diazez ar gelennadurezh stadel ma sav diouti hiziv kement tra a vez sevenet e Breizh evit krouiñ ar Stad a zo pal an Emsav. Dre ar gelennadurezh-se emañ adunanet en ur c'horf kempoell an holl luskadoù emsavel a ra Istor Breizh, adalek politikerezh NEVENOE betek prienterion gentañ ar Stad Vrezhon en eil palevarzh ar c'hantved-mañ. En ebrel 1965 e voe lakâet en e sav ur bodad-studi politikel, e genver 1967 e teue niverenn gentañ ar gelaouenn bolitikel Emsav, en here 1967 e voe diazezet stroll-bleniañ an Emsav rakstadel, dezhañ da gefridi gentañ leviañ framm an aozadurioù kevreet ha kenurzhiañ e greskidigezh.

Un arackadenn vras eo krouidigezh ar stroll-bleniañ. Gantañ e kav an aozadurioù-stummañ hag ar skourroù all eus an Emsav frammet ar goudor politikel na c'hellont ket dioueriñ. Drezañ ivez ez eus savelet un obererezh kefridiel hag ur vuhez foran diforc'h da vat diouzh an obererezh hiniennel hag ar vuhez prevez, ha roet un dro

stadel d'ar vuhez vroadel. N'emañ ket mui an Emsav harpet war bersonelezhioù, pilerioù bresk a ziflosk deiz pe zeiz, met war un azez dibersonel adeiladet diouzh ezhommoù ar vuhez foran.

Hiviziken, evel pep keodedour en e rezid, en deus an emsaver div vuhez : ur vuhez foran dre an obererezh a ren er framm, ur vuhez prevez, a zo ivez emsavel, en e diegezh, en e zarempredoù a geneiliez, - an darempredoù-mañ a geneiliez o vezañ peurliesañ skoulmet da geñver e vuhez emsavel foran a-hend-all.

Ur wellaenn vras a zeu ivez dre berzh ar framm rakstadel d'an emskiant vroadel hec'h-unan. Diveuziñ a ra houmañ eus latar an drivliadelezh hiniennel, mammenn an dizurzh hag an diefedusted, evit en em anaout evel micherourez ar sevel-Stad. Er c'heñver-se, ha n'eo ket unan eus ar c'heñverioù disterañ da lakaat e kont, e kemer endeo ar framm rakstadel, forzh pegen eginek e ve, roll ar Stad : bezañ benveg-ergorelaat, ha dre-se benveg-unvaniñ ar vroad. Drezañ e paouez an ober broadel a vezañ an difreterezh emdarzhek ha c'hwitus hon eus anavezet, evit gwiskañ ar furm emouiziek ha bastus a zo e gwirionez furm pep ober stadel.

A-vec'h diwanet en deus bet ar stroll-bleniañ politikel kudennoù pleustrek da zirouestlañ.

En-dro d'ar framm rakstadel ez eus ur rodennad hiniennelezhioù, mui pe vui enkorfet en oberennoù diseurt, a zo dilerc'hioù an Emsav kent. Kudennoù a sav ganto, amjestr alies, a zo neoazh diskoulm dezho. Eus an dud hag an oberennoù-se e c'haller ober daou rumm : ar re a zo chomet yac'h ganto ar spered emsavel, - ar re-mañ a wel gant levez un Emsav frammet o tiwanañ ha darev int da genlabourat. Ar re all zo al ledemsavioù, pe an emsaverion aet da fall ganto ar spered emsavel, a gil rak an Emsav frammet, a gouezh buan d'o zro el ledemsavioù. Unan eus heuliadoù diazezidigezh an Emsav frammet a vo, n'eo ket hepken rediañ an emsaverion silwink da zibab etre an Emsav hag al ledemsavioù, met skubañ kuit mougenn al ledemsavioù eus gouloù an Emsav.

E-se, emañ ar rodennad o vont da steuziañ buan. Kenkoulz-all, n'eo ket ganti emañ ar gudenn, met gant ar pezh a zo en tu all dezhi ha na welomp ket mat peogwir eo stanket ar gwel dimp ganti end-eeun. Koulskoude en tu all da rodennad an Emsav kent hag al ledemsavioù emañ ar re ma labour an Emsav frammet evito, pobl Vreizh. Anat eo n'en deus an Emsav nemet kollet re a amzer a-raok sammañ enkadennoù ar vro. P'emañ hiziv a-wel dezhañ diskoulm e gudennoù diabarzh, e c'hallo gwelloc'h a-se en em astenn d'ar vro, ha reiñ da stourmoù-bevañ ar Vrezhoned ar goudor, ar ster, ar pal hag an unvaniezh a vank dezho evit bezañ trec'h.

Kement-se ne empleg ket e tle an holl oberennoù brezhon bezañ sterniet gant an Emsav frammet. Aze e kejmp en-dro gant pennaenn an div veli (4), eleze an aotrouniezh speredel hag ar galloud politikel.

Kefridi ar galloud politikel eo plediñ gant ar gumuniezh vroadel e stern ar Stad. Kefridi an aotrouniezh speredel eo plediñ gant ar madoù emañ ar Stad end-eeun en o gwazonezh, en o zouez ar re end-eeun a zo sol he reizhwiriegezh. Da skouer, mar ro ar Stad da izili ar gumuniezh vroadel an tu da embreger o rezid, ez eo emell an aotrouniezh speredel termenañ ar rezid-se ha diorren ar skiant anezhi er gumuniezh vroadel. Kemplezh eo an darempredoù etre aotrouniezh speredel ha galloud politikel, ha pep Stad he deus d'o savelañ war an dachenn : kement a ziskoulmoù ez eus hag a Stadoù. War ar bazenn m'emañ an Emsav, ne c'hellomp ket tremen hep reiñ ur pleusk kentañ d'an darempredoù-se.

Ma n'he deus ket ar Stad ar gwir da virout nep den a gemer perzh en aotrouniezh speredel, ne c'hell ket ivez an aotrouniezh speredel lakaat ar Stad en arvar. Kemeromp div skouer, hini un oberenn relijiel, an Unvaniezh Speredel, hini un oberenn lennegel, Al Liamm.

An Unvaniezh Speredel zo he fal krouiñ ur gumuniezh a spered

relijiel etre kristerion an Emsav. Al Liamm zo he roll embann ober-
 ennoù lennegel an emsaverion, dre-se krouiñ ur vuhez speredel unvan
 gwriziennet en endoniad bev an Emsav, bezañ egin ar sevenadur brezh-
 on a vleunio er vro adsavet. E-keñver an oberennoù-se en deus an
 Emsav politikel frammet ur rumm dleadoù : o anaout evel dalc'hour-
 ezed ha krouerezed madoù 'zo eus ar gumuniezh en deus-eñ da leviañ
 ha da ziorren; o anaout ivez evel unvezioù kevredigezhel dizalc'h
 dioutañ ent-frammel, - e nep doare ne c'hell ur bodad renet gant an
 aotrouniezh speredel talvezout da venveg d'ar galloud politikel,
 nag ivez da venveg a c'halloud politikel; da heul, doujañ d'o diz-
 alc'hted hag he gwareziñ.

E gwir ar galloud politikel avat emañ goulenn digant an aotr-
 ouniezh speredel ma ne lakaio ket diazezoù ar Stad (pe an Emsav) en
 arvar. Lakaomp e stagfe ur gevredigezh speredel da ledañ ur gelenn-
 adurezh noazus d'an Emsav, e rankfe an Emsav politikel diskouez e
 c'halloud en he c'heñver ha lemel an nozadur.

An aotrouniezh speredel diouzh he zu n'emañ ket diveli dirak ar
 galloud politikel. O fal d'an daou o vezañ plediñ gant mad boutin ar
 vroad, he deus an aotrouniezh speredel ar gwir leun da varn ar gall-
 oud politikel war an doare ma seven e gefridi war e dachenn, da lav-
 arout eo e stern ar Stad, hag embann he barnedigezh a-benn heñchañ
 ar vroad, diouzh ret war-du un diskoulm a c'hell bezañ an dispac'h
 freuzañ-Stad.

Setu perak, adalek bremañ, e tle an Emsav frammet sellout evel
 reizh kaout en e gichen oberennoù o verkañ al lec'h a zalc'ho an
 aotrouniezh speredel e-keñver ar Stad.

(1) Sl. Perak devezhioù studi politikel ?, Emsav 11/283, ha 290.

(2) Daveet ar yo roll an testenioù ret evit piaouañ graz ar sebour-
 iezh e diwezh ar 6^t bloavezh-skol da gement hini en goulenn
 digant S.A.D.E.D.

(3) Pennañ testennoù politikel An Avel hag Avel an Trec'h zo bet
 adembannet gant Preder, Teskad skridoù politikel Youenn OLIER,
Tonkad 62, Kaier 37-38, 1962.

(4) Sl. Gwerinveliezh, Emsav 9/223, ha 225 pergen.

EVEZHIADENNOU WAR STAGIDIGEZH BREIZH OUZH BRO-C'HALL

O lenn levrioù Istor Breizh pe ar strobell lizheradurel pourchaset d'al ledenez-mañ gant abafferion ar stourm rannvroel e weler mat n'eo meizet e nep doare ster ar stagidigezh ouzh Bro-C'hall c'hoarvezet e derou ar 16^t kantved. Setu perak n'eo al lodenn vrasañ eus ar stourmoù embreget e Breizh evit hec'h adsevel sañset nemet reuzioù kilstourmel. Grevus eo ar reuzioù-se e meur a zegouezh, met dreist-holl peogwir e kasont Brezhoned kalonek da zisoc'hoù c'hwitus na reont nemet drastañ buhezioù tud ha pellaat un tamm muioc'h bemdez ar vro diouzh hec'h adsavidigezh. Klaskomp gwelout un tamm sklaeroc'h. Da zibenn an Dugelezh eo aet da get pezh a chome eus rouantelezh Vreizh. An darvoud nesañ zo bet flastridigezh an arme vrezhon e Sant-Albin-an-Hiliber. Arabat ankouaat da gentañ an abegoù hollek o deus kaset ar vatimant kozh d'ar strad :

- Rannadur ar gevredigezh vrezhon etre brezhonegerion enket er stuzegezh keltiek ha gallegerion levezonet gant sevenadur arnevez Bro-C'hall o tiorren.

- Diouer a spered politikel e-touez ar vrientinion.

Dezrann an abegoù hollek o deus disoc'het d'ar stagidigezh.

Anat eo n'he doa ken Breizh benveg politikel, meradurel, diplomatel, soudardel, finañsel na sevenadurel sirius ebet evit diorren hec'h uhelvennad broadel, na zoken gwareziñ ur gevredigezh vrezhon diempret.

Ar vuhez vroadel

Moarvat e chome a-strew un tamm dre-holl elfennoù eus ar vroadelezh vrezhon, hogen, n'eus tu ebet adarre da lavarout e oant frammet er pezh a zo ret mat envel ur vuhez vroadel wirion. Ar vuhez vroadel

n'eo ket n'eus forzh petra, n'eus forzh pe drivliad breizhat, met kenc'hoari holl nerzhioù speredel ha danvezel ar vro e sell da seveniñ galvidigezh hollvedel ar gevredigezh vrezhon. Moarvat o deus degaset ar Vrezhoned hini ha hini meur a dra d'ar bed, - er Gwir : levezon Sant-ERWAN war ar vreutaerion, levezon Beltram AN ARC'HANTREG war ar gwir etrevroadel; er Vezekniezh : kavadennoù LAENNEC, h.a. Evel kumuniezh vroadel n'o deus degaset netra d'ar bed a-vremañ. Er c'hontrol, kemeret o deus ar Vrezhoned perzh evel goprsoudarded er brezelioù impalaerel a-enep d'ar gouennoù pe d'ar sevenadurioù isdiorreet, ha n'o deus kemeret perzh oberiant ebet en aozadurioù etrevroadel na degaset o strivoù da skoazellañ ar broioù all o tiorren.

Elfennoù ar vuhez vroadel

Distroomp war ar rannoù meneget eus ar vuhez vroadel. A-fet politikerezh ne c'haller ket kemer evit kendivizoù politikel ar flap kaset er Breudoù pe e Parlamant Breizh a-hed o dalc'hoù bloaziek. Tennañ a rae ar re-mañ muioc'h d'ur bourouell mat da abuziñ amzer vak noblañsoù dilabour eget da brientidigezh un emsav politikel youlek. N'eo ket e vefe bet diot penn-da-benn pezh a veze lavaret enno, diefed a-grenn kentoc'h evit diskoulmañ tonkad reuzeudik ar vro. N'o deus talvezet nemet da douellañ Breizhiz keit ha m'int padet.

Heñveldra evit ar veradurezh : ur wech kouezhet ar veli bolitikel e krabanoù an estren, n'eo mat ar veradurezh nemet da seveniñ urzhioù ar veli-se, da lavarout eo da gorvoiñ pinvidigezh ar vro, peurgetket ar binvidigezh armerzhel a-benn diorren armerzh Bro-C'hall he deus tennet evel-se ul lodenn vras eus he galloud a-vremañ eus Breizh. M'he deus Breizh da adkemer ar pezh a zo bet tennet diganti, ne vo kaset da benn al labour restaoliñ-se nemet pa vo ur veradurezh sentus ouzh ezhommoù ar bobl vrezhon ha n'eo ket ouzh c'hoant-skrapañ un impalaerded aloubus.

Petra a rae diplomated Vreizh e kantvedoù diwezhañ an dieubiezh ma n'eo ket plediñ dreist-holl gant eurediñ en estrenvro hêrezed an tiegezhioù uhel ha difenn brientoù un nebeut noblañsoù diatebek ? Ar re o deus bet an eurvad da lakaat o fri e dielloù an diplomaterezh brezhon kent ar stagidigezh ouzh Bro-C'hall a oar mat n'eus ket enno kalz trechal gant difenn madoù ar vro evel ar c'henwerzh diavaez, an dud divroet, ar verdeadurezh pe ar c'hevratoù sinet gant embregerezhioù ar broioù all.

Hag ar soudarded. An holl a oar e oa hogos dieub pep Breizhad d'en em c'hoprañ e servij ar C'hallaoued, ar Saozon, an Alamaned, diouzh ma troe en o fenn pe diouzh ma vezent paeet kentoc'h : kounaomp avanturioù GWESKLIN er c'heñver-se, ur soudard na oa ket e-unan emichañs, ha n'en deus graet goude-holl nemet evel ul lodenn vras eus e genvroiz betek en hon amzerioù.

Keloù ebet kennebeut eus ur politikerezh speredek diwar-benn finañsoù ar vro goude drouziwezh ar stagidigezh ouzh Bro-C'hall. Moarvat e krede da dud 'zo e oa a-walc'h peuriñ un tamm muioc'h bemdez diwar ar gouerion, ar besketarion pe ar vicherourion vihan evit adsevel an teñzor foran, hogen e nep lec'h ne gaver meneg eus ur raktres bennak evit prientiñ ur stourm moneizel nevez. Ret e vije bet kaout un tamm ijin evit-se, gwir eo, hag e oa kement-se goulenn re war a hañval digant hon uhelidi. Re abred marteze evit tud 'zo ? Koulskoude d'an ampoent-se end-eeun edo broioù evel Bro-C'hall pe Vro-Saoz o klask diazezoù mennoziadel d'o moneizioù a-benn ober anezho kalvezerezhioù arveradus evit an armerzh arnevez.

Ha talvezout a ra ar boan komz eus sevenadur d'ur c'houlz n'eo deuet Breizh a-benn da seveniñ mennad resis ebet e-keñver he zonkad ? Eus ar sevenadur keltiek en doa bleuniet war al ledenez-mañ eus ar pempet d'an dekvet kantved n'eus bet kavet nemet bruzhun da zastum. Eus ar pemzekvet kantved da zibenn an naontekvet kantved zoken ne vo graet, remziad goude remziad, nemet rastellat ar c'hornbroioù,

ar rannyezhoù hag an troioù-lavar e-ser renkadur ar gerioù burzhudus-se e geriadurioù a bep seurt. Un toullad folklorourion hepken evel H. KERVARKER pe F. AN UHEL a soñjo eo mat ivez dastum skridoù. Ret eo bet gortoz derou an ugentvet kantved a-rack gwelout skridoù nevez o tont da ziskouez e c'hell an ijin brezhon en em zispakañ c'hoazh war an douar trubuilhus-mañ. Atredoù rouantelezh Vreizh zo bet dastumet a-hend-all, gwir eo, gant an hengounioù hag an dielloù a bep seurt strobet gant an istorourion. Met aner eo deoc'h klask e kement-se ar youl da adsevel Breizh evel bro. Keuz d'an amzer dremenet hepken a-berzh tud na ouzont ket sammañ o reuzeudigezh a drec'hidi na disoc'hañ.

Daoust ma'z eo du an daolenn e vezer degaset da anzav n'eus nemeti a c'hell displegañ dre vras penaos eo bet goueledet ken aes an ensavadurioù broadel goude faezhidigezh Sant-Albin-an-Hiliber. An emgann-mañ n'eo bet nemet un darvoud a c'hellfe bezañ c'hoarvezet abretoc'h pe ziwezhatoc'h, met a zo da gompren n'eus forzh penaos en un emgav hollek. Anez degemerout seurt savboent a glot gant ar pezh a anavezomp eus ar mareoù-se n'eus tu ebet da gendivizout en un doare reizhpoellek diwar-benn tonkad ar vro na da empennañ un hent bennak d'an adsavidigezh.

Emgann Sant-Albin-an-Hiliber en deus krennet Istor Breizh dre an nerzh, peogwir en deus an nerzh brezhon graet diouer pe c'hwitet en deiz-se. Aner eo enta gortoz un diskoulm emsavus hep implij adarre an nerzh a zivac'ho Breizh diouzh hec'h enkadennoù. Ar gudenn eo gouzout petra eo an nerzh ha penaos e vez adsavet ur vro aloubet pe zoken pezh a zo gwashoc'h dic'houzvez eus he broadelezh. Kement-mañ a zegas ac'hanomp adarre d'an Emsav.

Hentennoù evit dizarbenn ar stagidigezh.

Ur wech dezrannet abegoù hollek drouziwezh Istor Breizh aroueziet gant ar stagidigezh ouzh Bro-C'hall, n'eus nemet kemer an hent

kontrol evit adsevel. Prantadoù an adsav zo neuze :

1. Unvanidigezh ur yezh lennek ha krouidigezh ul lennegezh vroadel.
2. Studi an Istor ha diorreidigezh ur gelennadurezh politikel.
3. Stummidigezh emsaverion a vicher hag o frammidigezh en ur strollad broadel.
4. Prientidigezh an dispac'h broadel a roy tu d'ar bobl vrezhon a-bezh da implijout an nerzh evit dizarbenn un tonkad estren a gondaon ar vro d'ur marv diremed.
5. Disoc'hidigezh an dispac'h broadel d'ur Stad Vrezhon a vo ar benveg reizh nemetañ gouest da ziorren Breizh.
6. Ar pal pellañ zo aotren d'ar Vrezhoned seveniñ o galvidigezh evel tud en dro-mañ.

Anat eo ivez ne c'hell hini ebet eus ar prantadoù-mañ bezañ lakaet en arvar gant Brezhon ebet, hag e tle kement hini a asur labourat evit Breizh bezañ barnet e strivoù e dave gant ar gelennadurezh emsavel.

"KUZUL AR BREZHONEG" HAG AN EMSAV

Krouet e voe Kuzul ar Brezhoneg e gwengolo 1957 evit bodañ ar c'helaouennoù hag ar c'hevredigezhioù o labourat e brezhoneg. "Pal ar C'huzul a zo harpañ e pep feson al labour graet evit ar yezh; bruderezh, dastum arc'hant ha difenn gwirioù ar brezhoneg unvan" (1).

Er mare-se c'hoazh edo an nec'h o ren e kalon meur a emsaver en abeg d'al ledemsavioù; en abeg ma kinnige ar C'hallaoued o skoaz-ellañ, goude bezañ aotreet dezho ur skrivadur evit ar brezhoneg, roet dezho ar gwir da gestal, h.a. (2). Santout a rae an emsaverion an ezhomm d'en em unaniñ evit derc'hel penn. Evel-se e tiwanas Kuzul ar Brezhoneg. Gwander bras ar gevredigezh nevez avat oa bezañ ur c'horf a yezherion gant mennozhioù politikel, e-lec'h bezañ ur c'horf a bolitikerion gant mennadoù war ar yezh. Koulz ha netra e oa he nerzh dirak nerzh ar Stad C'hall, an hini a oa da dizhout a-dreñv spesoù al ledemsav.

S.A.D.E.D. a zeuas da ezel Kuzul ar Brezhoneg d'ar 6 gwengolo 1964, - dre spered a genurzh. War un dro avat e resisae S.A.D.E.D. e bal :

"Hor strollad n'eo ket ur strollad politikel. Padal, ur ster politikel zo d'ar pezh a ra S.A.D.E.D..

"S.A.D.E.D. a lakaomp da lodenn eus ur framm klok. Ar framm klok zo kement ensavadur he deus hor bro ezhomm evit bevañ e-touez ar broioù all. S.A.D.E.D. en deus dibabet un dachenn resis, an deskadurezh eil derez; n'emañ ket e soñj mont er-maez eus an dachenn-se.

"Evitañ da vezañ war un dachenn strizh avat, en deus hor strollad ur pal politikel. Dibabet en deus bezañ war an hent a gas d'ar Stad Vrezhon. A-walc'h eo evit bremañ, evit gouzout spis kement en deus d'ober, lakaat emañ S.A.D.E.D. war an hent a gas d'ar Stad Vrezhon. Bep ma klokaio d'ar framm e spisaio da stumm ar pal." (3).

En ur ober tri bloaz avat ez eo aet ar framm war glokaat. Strolladoù all zo bet krouet, kevreet strizh e-keñver levrierezh ha

gwazerezh ouzh S.A.D.E.D.. An hini diwezhañ-holl, Emsav, zo bet ur gammed a-bouez war-raok. Gantañ ez eus deuet kemmadurioù bras e dezvad S.A.D.E.D. : paouez a ra ar strollad-mañ a vezañ emren evit bezañ enframmet en un aozadur ledanoc'h dindan ul levierzh politikel. Korf a stummerion gant mennadoù politikel etre 1962 ha 1967, e teu e 1967 da vezañ skourr-stummañ en ur c'horf politikel (4).

Da heul ar c'hemmadur-se e ranke S.A.D.E.D. ober un adwel war e engouestladurioù diavaez, en o zouez al liammoù etrezañ ha Kuzul ar Brezhoneg.

Diouzh un tu ne c'halle ket tremen hep reiñ da anaout d'ar C'huzul an engouestladur nevez edo o paouez kemer. Diouzh an tu all e tlee, mar dlee chom ezel eus Kuzul ar Brezhoneg, goulenn digantañ gwarantou e seurt doare ma ned afe ket e liamm ouzh ar C'huzul d'ur skoilh en e hent politikel, en e labour pe en e surentez.

Aze eo dav menegiñ un nebeut devoudoù.

Mar klasker termenañ obererezh Kuzul ar Brezhoneg, e chomer berr : ur meni kuzul-brezel e voe er mare ma lakae al ledemsavioù, a greded, an Emsav en arvar. Hiziv, tremenet an dañjer, e talc'h ar C'huzul da vodañ e izili div wech ar bloaz. Un doare eo evito d'en em welout ha da zanevellañ al labour o deus sevenet en o bloavezh. Aotreet eur d'en em c'houlenn, hep droukvenn, da betra e talvez Kuzul ar Brezhoneg.

A-du-rall, meur a wech en deus Kuzul ar Brezhoneg embannet "ne rae ket a bolitikerezh". Pezh a zo ur mennad diboell forzh penaos, rak unan eus kudennoù diazez pep Stad eo dre anien kudenn ar yezh. Hogen Kuzul ar Brezhoneg ne dremen ket hep ren un ober politikel, evel m'emaomp o vont da ziskouez, - en ur ziskouez ouzhpenn ez eo an ober politikel-se dizegemeradus gant nep aozadur a gemer ar Stad Vrezhon d'e bal.

En ebrel 1959 e kase ar C'huzul bodet e Karaez ul lizher o

"c'houlenn gant doujañs digant Pennadurezhioù ar Vro ober ar pezh a zo en o galloud evit ma c'hell ha ma venno Breizhiz

yaouank gounit o buhez en o Bro, hag adsevel ur Vreizh nevez ha pinvidik. ()

"Pa'z eo ken grevus stad an traoù, ha poent-bras diskoulmañ kudennoù Breizh bet dilezet keit 'zo, e c'houlenn Kuzul ar Brezhoneg digant Kuzulioù Meur ar pemp departamant breizhat, hag ar Parlamantourion en em vodañ e Roazhon da studiañ gant dileuridi ar Gouarnamant an diskoulm da gudennoù ar c'henwerzh, an ijiner-ezh, al labour-douar, ar pesketaerezh, ar c'helennerzh..."

Meur a wech ivez etre 1961 ha 1965 e klaskas Kuzul ar Brezhoneg kenlabourat gant Kendalc'h (5) ha Fondation Culturelle Bretonne Emgleo Breiz, aozadurioù ledemsavel o tegemerout ar galloud gall da c'halloud reizh ar vro-mañ. Studiet e voe zoken gant burev ar C'huzul ur mennad goulenn emezelañ en aozadurioù-se.

E mae 1967 e voe savet dindan anv Kuzul ar Brezhoneg ul lizher nevez da "ItIt hag AoAo Dilennidi Departamantoù Breizh" evit ma ve roet o reizhskrivadur da anvioù-lec'h ar vro war ar panneloù-hentoù. Daoust ma ne sinas ket S.A.D.E.D. al lizher-se e voe lakaet e anv en traoñ anezhañ evel unan eus ar sinerion. Klemm a savas, hogen ne voe ket degemeret e glemm.

Dav e oa da S.A.D.E.D. avat, a-raok kemer nep disentez, gouzout hag-eñ e oa mennet Kuzul ar Brezhoneg da gemer ur pouez bennak en Emsav, ha dreist-holl da reizhañ e linenn bolitikel.

D'ar c'hentañ a viz here 1967 e rae dileuriad S.A.D.E.D. an diskleriadur-mañ dirak Bodadeg Veur ar C'huzul dalc'het e Karaez :

1. Emañ S.A.D.E.D. o kemer lec'h en Emsav-dieubiñ. Ar mennad-mañ zo hini ar Strollad abaoe e grouidigezh (sellout Danevelloù 1964 Kel-14/17, Danevelloù 1965 Kel-22/4, Danevelloù 1966 Kel-122/603). Enframmet eo bremañ S.A.D.E.D. en emsav politikel brezhonek. Da heul an engouestladur-se :

a) e kendalc'h S.A.D.E.D. gant e gefridi a zo bezañ ur skol evit an emsaverion diouzh ezhommoù an emsav politikel brezhonek (sellout Danevelloù 1963 Kel-3/8, Danevelloù 1964 Kel-14/16-17, Danevelloù 1965 Kel-22/11-13, Danevelloù 1966 Kel-122/603,615)(') ;

b) hogen n'eo ket aotreet ken S.A.D.E.D. da gevreañ
- na gant kevredigezhioù na gemeront ket da bal savidigezh ar Stad Vrezhon pe a anavez e doare pe zoare gwirioù d'ar galloud gall e Breizh ("),

- na gant kevredigezhioù na gemeront ket da bal savidigezh ur

Stad a yezh vrezhonek pe a zegemer ur yezh estren d'o yezh labour ("');

k) ez asant Izili S.A.D.E.D. d'an engouestladur hollel ez eo hini an Emsav-dieubiñ. Dre-se ne c'hell ket S.A.D.E.D. sellout evel un engouestladur gwirion an ereoù a zo bet betek-henn etre Kuzul ar Brezhoneg hag ar c'hevredigezhioù bodet gantañ.

2. Goulenn a ra S.A.D.E.D. digant Kuzul ar Brezhoneg :

a) pe : 1/ spisaat e lec'h e-keñver ar politikerezh, da lavarout eo e-keñver ar Stad C'hall diouzh un tu, e-keñver an emsav politikel brezhonek o komz en anv ar Stad Vrezhon diouzh an tu all (""),

2/ dibab ur pal pleustrek hag hentoù-ober d'e dizhout,

3/ en em frammañ e-keñver an ober dibabet, e doare da stignañ etre e Izili keñverioù-labour ha da fetisaat engouestladurioù war an dachenn e-ser ur programm termenet dre ar munud ha deiziadet strizh;

b) pe, mar kav ez eo dic'halloud da seveniñ an tri c'hraf amañ diaraok, embann e zivodadur.

3. Ne vo ket S.A.D.E.D. evit gortoz pelloc'h eget ar c'hentañ a viz genver 1968 disentez Kuzul ar Brezhoneg a-zivout ar goulennoù graet outañ. Diouzh ar respont roet gant Kuzul ar Brezhoneg e ouezo S.A.D.E.D. hag-eñ e c'hell lezel e anv war roll Izili Kuzul ar Brezhoneg. Hep respont d'an termen merket, ez en em gavfe S.A.D.E.D. dieub diouzh pep engouestladur e-keñver Kuzul ar Brezhoneg.

Izili 'zo eus Kuzul ar Brezhoneg o vezañ goulennet resisadurioù diwarbenn poentoù 'zo eus diskleriadur S.A.D.E.D., e voe roet dezho ar respontoù-mañ. Dave a ra an arouezioù etre krommelloù d'an arroudoù resisaet.

("") Lodek eo S.A.D.E.D. en emsav politikel a zo e bal sevel ar Stad Vrezhon. S.A.D.E.D. a zegemer ar pal-se, hep mont ('') er-maez eus an dachenn obererezh dibabet gantañ da lavarout eo an deskadurezh.

Hogen, degemerout pal an emsav politikel a empleg an engouestladurioù-mañ :

("")("") - degemerout hep distro kement a zo bet diazezet gant an emsav politikel war dachenn ar yezh, da lavarout eo :

("") - degemerout ar brezhoneg da yezh nemeti evit al labourdiabarzh hag an darempredoù etre e Izili (en ur aotren ar yezhoù all e degouezhioù termenet spis, ha bepred en darempredoù diavaez);

("")("") - degemerout ar stumm stadel roet d'ar brezhoneg, da lavarout eo ar reizhskrivadur diferet e 1941;

- (")("") - chom hep ren ober ebet, embann mennad ebet o vont a-enep da oberoù ha mennadoù an emsav politikel;
- (")("") - chom hep reiñ skoazell e nep doare da oberoù pe vennadoù o lakaat en arvar, gant rat pe get, diazezoù an emsav politikel, pe o vont a-enep da oberoù ha mennadoù an emsav politikel.
- (')("") Ne c'houlenn ket S.A.D.E.D. digant Kuzul ar Brezhoneg dilezel an dachenn en deus dibabet, na mont er-maez eus an dachenn-se e nep doare. Goulenn a ra digantañ avat diskleriañ penaos e veiz lec'hiadur an dachenn-se e-keñver ar politikerezh.

Ouzhpenn e c'houlenne adarre S.A.D.E.D. ouzh Kuzul ar Brezhoneg ha dianzav a rae al lizher d'an "dilennidi" c'hall. D'ar goulenn-mañ en devoe an hevelep respont, da lavarout eo n'emañ ket ar C'huzul e soñj kemmañ e linenn bolitikel.

S.A.D.E.D. a zaveas neuze ar gudenn dirak Poellgor-Leviañ Emsav. Hemañ a gasas da Kuzul ar Brezhoneg al lizher-mañ :

"Heuliet hon eus gant evezh emdroadur an darempredoù etre Kuzul ar Brezhoneg ha S.A.D.E.D. abaoe ho Podadeg Veur eus ar 1^{añ} here 1967.

"S.A.D.E.D. zo ur strollad o plediñ gant an deskadurezh, diazezet er framm politikel a zo dezhañ da bal sevel ar Stad Vrezhon.

"Dre nac'h freuzañ al lizher ho poa savet evit an "dilennidi" c'hall, e tiskouezit ez oc'h mennet da c'houlenn digant ar Stad C'hall ur goudor na c'hell bezañ roet d'al labour sevenadurel nemet gant ar Stad Vrezhon pe gant an aozadur politikel o komz en hec'h anv.

"Dre an diouer-se a ziazez n'eur ket evit reiñ ur frammadur da Kuzul ar Brezhoneg ha da heul, n'eo ar gevredigezh-se evit ren obererezh ebet.

"An diouer-se a ziazez ouzhpenn-se zo noazus ouzh ar c'hevredigezhioù o deus fiziet o anv e Kuzul ar Brezhoneg, ken e-keñver efedusted o labour, ken e-keñver o brud vat, ken e-keñver o surentez.

"Dre-se e roomp urzh da S.A.D.E.D. d'en em dennañ eus Kuzul ar Brezhoneg."

D'an 30 du 1967 e paouezas enta S.A.D.E.D. a vezañ Ezel eus Kuzul ar Brezhoneg.

*

* *

Nec'het e voe darn eus izili Kuzul ar Brezhoneg gant diskleriadur S.A.D.E.D.. Evito ne rae al lakadenn : un afer bolitikel eo tonkad ar brezhoneg, nemet degas dizurzh er gengevredigezh. An dizurzh avat ne zeue ket eus al lakadenn hec'h-unan, met eus an dic'halloud ma oant d'en em intent nag a-du ganti nag a-enep dezhi.

Mat eo, evit reiñ da gompren ster hollek an diviz kemeret gant S.A.D.E.D. hag Emsav, ren un dezrannadenn spis eus stad an traoù e Breizh er mare-mañ. Dindan dri fenn e lakaimp hon dezrannadenn :
I. Ar studioù II. Ar sevenadennoù III. Ar stourmoù.

I. Ar studioù.

Un niver mat a dud a ra studioù war Vreizh.

1. Reoù 'zo a studi ar yezh hag ar yezhoniezh, ar grennezh, an henezh, al lizheradur kozh hag arnevez; an henistor hag an hanez kempredel; ar stuzegezhioù lec'hel bremañ ha tremenet, an teodyezhoù, ar folklor, h.a.

2. Reoù all a studi stad ar gevredigezh, kendreiñ ar boblañs, frammadur ar c'hendereoù; dasparzh ar gennadoù armerzhel, argemmadur ar c'horvoderioù, isdiorreadur ar vro, h.a.

War veur a amboaz disheñvel avat e vez renet ar studioù-se :

a) Pe evit bastañ d'un ezhomm eus an Emsav frammet : evit en em stummañ evel emsaver; evit prientiñ ar Stad a zeuio da dermen al labour-dieubiñ hag ar sevenadur a zisoc'ho dioutañ.

b) Pe evit mad ar studier e-unan a gav eno e blijadur digenvez pe lodennet gant kenseurtes. An hent-mañ n'eo ket dre ret diboell, na dre ret didalvoud. Hogen, dindan levezon an Emsav, dre anadenn an heklev (6), ez eo techet studierion ar rumm-mañ d'en em lakaat da zifennerion ha da virourion an danvez a studiont. Evel-se e weler e Breizh tud o stourm evit dere'hel ar stuzegezhioù henvoazel (7) en o sav. Ur stourm diboell eo, ha noazus ouzhpenn, pa glask an dud-se tremen da emsaverion.

k) Pe evit mad un aozadur estren bennak a c'hopro ar studier, o c'hrataat dezhañ da skouer grazioù er Skol-Veur en eskemm d'e bleustradennoù war stuzegezh, poblañs pe armerzh Breizh, o fiziout ennañ kargoù kefridiel a-benn startaat e "lealded" d'ar Stad.

Amañ e ranker lakaat un notenn evit degas sklerijenn e speredoù 'zo. Ur c'hefridiad eus an Emsav a c'hell bezañ implijad eus ar Stad C'hall, - pa'z eo mad an Emsav ma ve el lec'h-se, pe voutinoc'h, pa rank kaout ur goprer. N'eus aze kudenn ebet. Kudenn ez eus hepken evit ar re na ouzont ket pelec'h int kefridiaded ha pelec'h implijidi.

II. Ar sevenadennoù.

Lec'h ez eus da vegañ goanag pa niverer an dud a spered, a youl hag a intrudu a vez hiziv o poaniañ war zouar Breizh evit kas sevenadennoù da vat war an holl dachennoù.

1. Tud o ouestlañ eurvezhioù bemdez da reiñ lusk ha lufur d'ar yezh, da sevel ha da embann oberennoù e brezhoneg, da ledañ ar yezh dre he c'helenn hag he brudañ, en o ziegezh, en o c'hêr, er vro.

2. Labourerion-douar o tiskouez nerzhder ha herded espar evit kreskiñ askorusted o atantoù; danvez diorreerion oc'h en em gannañ feuls e dezerzh an armerzh breizhat.

